




KENVREZURIEZ AR BREZONEG





AMZER AN AZVENT

SUL I a AN AZVENT



Lennadenn I a.- An dud hirio koulz hag en amzer ar profed, a zav o mouez warzu Doue. Gwasket gand ar pehed, ar boan, an enkreiz, e pedont anezañ da zond : "A! ma tigorfeñ an neñvou!"

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (63/16 - 64/8)

- 16- C'hwi, Aotrou Doue, a zo Tad deom;
Or Zalver eo hoh ano a viskoaz.
- 17- Perag, Aotrou, e lezit ahanom diañket pell diouzoh,
e lezit or halonou kaledet, heb doujañs deoh ?
Deut en-dro, abalamour d'ho servicherien, ha da rummadou ho pobl.
- 19- A! ma tigorfeñ an neñvou ! ma karfeñ diskenn
ha lakad ar menezioù da blada dirazoh !
- 64/2 Diskennet oh bet, ha dirazoh ar menezioù 'zo bet teuzet evel ar hoar.
- 3- Skouarn ebed n'he deus klevet, lagad ebed n'e-neus gwelet
eun Doue all oh ober kement
evid an dud a lak o fiziañs ennañ.
- 4- Dond a rit daved an dud a vez reiz o buez,
ar re a vir ar zonj ahanoh hag a heuil ho lezennou.
Hogen, setu e oa eet droug ennoh,
pa oam kouezet er pehed abaoe pell amzer;
penaoz e vefem salvet ?
- 5- Oll e oam deut da veza heñvel ouz tud lor,
on oberou gwella evel lienaj saotret;
Oll e oam dizehet, par d'an deliou a gouez euz ar gwez,
hag or pehejou, par d'an avelioù, a skube ahanom.
- 6- Dén ebed kén da bedi hoh ano, da staga e galon ouzoh en eur zihuni.
Ha c'hwi ho poa kuzet ho tremm ouzom,
lezet ahanom chadennet gand or pehejou.
Ha koulskoude, Aotrou Doue, tad oh deom;
ni 'zo ar pri, ha c'hwi ar poder :
oll ez om bet stummet gand ho taouarn. - (Setu komzou Doue.)
- 7-

SALM 79 Diskan : Salver ar bed, a! diskennit, (Kantik N. 107)
Euz ar pehed on dizammit;
Diskennit euz ar baradoz,
Emaom pell 'zo ouz ho kortoz.

- 1- Pastor pobl Israel, selaouit; c'hwi or pastor, diskouezit ho kloar;
dihunit nerz ho kalloud, ha deut d'or zikour.
- 2- Aotrou Doue, troit ahanom war on tu mad;
taolit warnom sklerijenn ho tal, hag e vezim salvet.
- 3- Doue ar bed a-béz, euz lein an neñv sellit;
deut da weled ar winienn-mañ, bet plantet gand ho torn.
- 4- Harpit gand ho torn an dén ho peus dibabet, mab an dén kennerzet ganeoh;
biken mui ne dehim pell diouzoh : digasit buez ennom, ha ni 'bedo hoh ano.

Eil Lennadenn.- "Emaom o hortoz ar Zalver da bara dirag on daoulagad."

LENNADENN EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT. (2 Kor.I/3-9)

- 3- Va breudeur, gras ha peoh warnoh
digand Doue on Tad ha digand Or Zalver Jezuz Krist.
 - 4- Trugarekaad a ran Doue bepred abalamour deoh,
evid gras Doue a zo bet roet deoh en Aotrou Krist.
 - 5- Ennañ ez oh deut pinvidig e peb tra,
gand teñzor komzou Doue hag an anaoudegez anezañ,
6- pa'z eo bet sañket doun ennoh an testeni roet d'Or Zalver.
 - 7- Evelse, ne ra diouer deoh donezon speredel ebéd,
en-dra ma hortozit Jezuz Krist, on Aotrou,
da bara dirag ho taoulagad :
 - 8- Eñ a raio deoh derhel stard beteg penn,
deoh da veza direbech pa erruo devez Jezuz Krist, on Aotrou.
 - 9- Derhel a ra d'e hér an Doue oh bet galvet gantañ
da gaoud perz er vuez gand e Vab, Or Zalver Jezuz Krist.
- (Setu komzou Doue.)

ALLELUIA. Alleluia. - Diskouezit deom ho madelez, SALM 84/8.
ha digasit deom ar Zalver.- ALLELUIA.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (13/33-37)

"Chomit dihun, pa n'ouzoh ket peur e teuo mestr an ti."

En amzer-se, edo Jezuz o komz gand e ziskibien euz e zistro :

- 33- "Taolit evez, emezañ, ha chomit dihun,
rag n'ouzoh ket peur e vo deut ar mare.
- 34- Bez' e vo evel pa vez eun dén eet da bell bro,
kuiteet gantañ e di ha roet galloud d'e vevelien,
pep hini war e labour,
ha gourhemennet d'ar porzier chom da veilla.
- 35- Chomit dihun eta,
rag n'ouzoh ket pegoulz emañ mestr an ti da zond,
diouz an abardaez pe da hanter-noz,
da gan ar hillog pe diouz ar mintin.
- 36- Diwallit na zeufe a daol trumm, ha kaoud ahanoh kousket.
- 37- Ar pez a lavaran deoh, a lavaran d'an oll : Chomit dihun!" - (Setu komzou Doue.)



Lennadenn Ia.- Dre vouez ar profed, e ro Doue Frealz, hirio c'hoaz,
d'e bobl gwasket gand an droug :

"Digorit an hent d'an Aotrou, emañ o tond."

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (40/1-5, 9-11)

- 1- Roit kalon, digasit frealz d'am fobl, eme ho Toue,
- 2- komzit ouz kalon Jeruzalem ha lavarit dezi a vouez kreñv
ez eo echu he sujidigez ha gwalhet he fehed,
rag diwar dorn an Aotrou
he deus bet diou wech kastiz evid heh oll fehejou.
- 3- Mouez eun dén a glever o krial :
"A-dreuz an dezert, digorit an hent d'an Aotrou;
en douarou fraost, trohit eeun eur wenodenn d'on Doue.
- 4- Ra vo stañket peb traonienn, diskaret peb menez ha torgenn,
kompezet ar hribennou, ha plêneet an tarroziou.
- 5- Emañ gloar an Aotrou o vond da bara, hag an oll dud a welo,
rag dre hénou an Aotrou ez eo bet lavaret."
- 9- Pignit war eur menez uhel, evid kas ar helou mad da Gêr-Zion;
savit ho mouez, ha kreñv, evid kas ar helou mad da Jeruzalem.
Ya, savit ho mouez heb aon, lavarit da gêriou Juda :
- 10- Setu ho Toue, setu an Aotrou Doue o tond e barr e nerz,
ha gand e vreh e vo an treh.
Emañ gopr e hounid gantañ ha frouez e dreh dirazan.
- 11- Par e vo d'ar pastor, a ziwall mad e zeñved,
a ra dezo, gand e vreh, chom bodet, - a zoug an oanigou e pleg e vantell,
hag a rén goustadig ar mammou derved.

SALM 84 - Diskan : Distroit da rei deom buez, - Ho pobl ennoh 'no levenez;
Diskouezit deom ho madelez, - Digasit ho silvidigez.

- 1- Selaou a rin petra 'lavarao Doue, an Aotrou :
Ar peoh evid e bobl, setu e gomzou;
Tost emañ ar zilvidigez d'an dud a zouj anezañ,
E'hoar a zeuio da jom war an douar.
- 2- Madelez ha gwirionez a ya an eil da gaoud ebén,
justis ha peoh d'en em vriata;
ar wirionez a ziwano euz an douar, hag euz an neñv e stouo ar justis.
- 3- An Aotrou a zigaso eürusted, hag an douar a zougo e frouez;
ar justis a gerzo en e raog, hag a zigoro hent d'ar zilvidigez.

Eil Lennadenn.- "Emaom o hortoz neñvou nevez hag eun douar nevez."

LENNADENN EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PER - (3/8-14) -

- 8- Eun dra 'zo, va breudeur kër, hag a dleñt soñjal ennañ :
eun devez a zo, evid an Aotrou, evel eur bloavez,
ha mil bloavez evel eun devez.

- 9- An Aotrou Doue ne ra ket dale gand e bromesa, evel ma lavar lod,
med gouzoud a ra kemer amzer ganeoh,
rag ne 'fell ket dezañ ez afe lod da goll,
med e kemerfe an oll hent ar binijenn.
- 10- Evelato, dond a ray dern
- 10- Evelato, dond a ray dervez an Aotrou evel eul laer,
pa yelo an neñvou da get en eur strakal, e vruzuno ar stered entanet,
hag e tevo an douar ha kement tra 'zo ennañ.
- 11- Neuze 'ta, pa 'z eo toñket d'an oll draou-se teuzi evelse,
na peseurt tud e tleit beza, dre zantelez ho puez hag ho toujañs Doue,
- 12- epad m'emaoh, mall ganeoh, o hortoz an donedigez,
hini dervez an Aotrou, a lako an neñvou entanet da vruzuna
hag ar stered da deuzi gand ar wréz (pe: ar gor).
- 13- Ya 'vad, ha neñvou revez, eun douar nevez ive
a hortozom hervez e bromesa; eno e vo bro ar justis peurvad.
- 14- Rag-se, va breudeur kër, en eur hortoz kement-se,
grit euz ho kwella evid m'ho kavo Or Zalver
dibehed ha direbech er peoh.

ALLELUIA. Alleluia.- Digorit an hent d'An Aotrou,
hag e welo peb dén silvidigez Doue.- ALLELUIA.

AVIEL JEZUZ KRIST

HERVEZ SANT MARK - (1/1-8)

- 1- Amañ e tigor kelou Mad Jezuz Krist, Mab da Zoue.
- 2- Hervez ar pez 'zo skrivet e levr ar profed Izaïaz :
"Setu e kasan va hannad en da raog : eñ a gempenno did an hent.
- 3- Mouez eun dén o krial en dezert: Kempennit an hent d'an Aotrou,
eeunit dezañ e wenodennou",
- 4- evelse e voe gwelet Yann ar Badezour en dezert,
o prezeg eur vadiziñt a binijenn evid kaoud ar pardon euz ar pehejou.
- 5- Diredeg a ree davetañ bro Judea a-bez hag oll dud Jeruzalem:
oh añañ o fehejou, e vezent badezet gantañ er ster Yordan.
- 6- Yann a oa gantañ dillad reun kañval, hag eur gouriz lèr en-dro d'e zargreiz;
e voued a oa killeien-raden ha mél gouez.
- 7- En e brezeg e lavare: "Emañ o tond war va lèrh an hini 'zo kreñvoh egedon,
ha n'on ket din zokén, en eur bleg, da ziskoulma lèrenn e voutou.
- 8- Me am eus badezet ahanoh en dour, eñ ho padezo er Spered Santel".

TREDE SUL AN AZVENT



Lennadenn genta. Evel eur gellidenn o tiwan euz an douar,
ar Zalver a ziwano diwar ar werhez.

Lennadenn euz levr ar profed Izaïas. 61/1-2^a, 10-11.

- 1- Spered an Aotrou Doue a zo warnon,
rag Doue e-neus da embann ar helou mad d'ar beorien,
da frealzi kalon ar re a zo er boan,
da lavared d'ar brizonidi o dilivrañs,

2^a - da embann eur bloavezh a hrasou a berz an Aotrou Doue.

10- Levenez estlamm am-eus gand an Aotrou,
ha tridal a ra va halon e va Doue.
Laket e-neus warnon gwiskamant ar zilvidigez,
ha mantell ar justis,
par d'eur pried nevez gand e zeizenn,
ha d'eur wreg nevez gand e bizou.

11- Rag evel ma teu kellid d'ar greun taolet en douar
ha ma tiwan an had el liorz,
ken sur all e lako an Aotrou Doue da ziwan
hadenn ar zilvidigez,
a roio gloar dezañ dirag an oll boblou.

SALM. Lukaz 1/46-48, 49-50, 53-54.

DISKAN : Meuleudi a gan va ene d'an Aotrou.

46- Meuleudi a gan va ene d'an Aotrou,
47- ha tridal a ra va spered gand Doue, va Zalver.
48- ablamour m'e-neus taolet e zellou
war e zervicherez dister.
Ya, diwar vremañ an oll dud, a rumm da rumm
a lavaro ez on eüruz :

49- Ken kaer traou e-neus greet evidon
an hini ' zo braz e halloud, ha santel e ano,
hag a skuill e vadelez, a rumm da rumm
war an dud a zouj anezañ.

53- Ar re o-deus naon a garg a vadou
ar re binvidig a gas kuit heb netra.

54- E skoazell a ro da Israel, e zervicher
rag ne zizoñj ket e vadelez.

EIL LENNDENN. Doue a beoh d'or zantellaad e kement a zo ahanom.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER FILIP 5/16-24.

16- Bezit laouen dalhmad.
17- Pedit heb ehan.
18- E kement a zigouez, trugarekait Doue.
Kement-se eo bolontez Doue Warnoh er Hrist Jezuz.
19- Na vougit ket ar Spered.
20- Na zisprijit ket ar brofeted.
21- Med pouezit mad peb tra;
ar pezh a zo mad dalhit anezañ.
22- En em ziwallit diouz peb droug.
23- Doue ar peoh e-unan d'ho santellaad,
e kement a zo ahanoh,
ha ra vezoh penn da benn, spered, ene, ha korv, dalhet direbech
evid donedigez or Zaver Jezuz Krist.
24- Fidel eo an hini ho kalv,
en eo adarre an hini a raio kement-se.

ALLELUIA, Alleluia. Spered an Aotrou Doue a zo warnon,
va haset e-neus da embann ar helou mad
d'ar beorien. Alleluia.

HERVEZ SANT YANN 1/6-8, 19-28.

- 6- Bez' ez eus bet eun den digaset gand Doue, a oa Yann e ano.
- 7- Deuet e oa evid beza test
evid rei testeni d'ar sklerijenn,
evid dougen an oll da gredi drezañ.
- 8- Ne oa ket hennez ar sklerijenn,
med evid rei testeni d'ar sklerijenn e oa.
- 19- Ha setu amañ an testeni a roas Yann,
pa oe kaset dezañ beleien ha levited, gand Yuzevien Jeruzalem,
da ober outañ ar goulenn-mañ : -piou out ?"
- 20- Hag e lavaras ar wirionez, n'he nahas ket,
hag e tisklerias : -n'eo ket me ar Hrist."
- 21- Neuze e houlennjont outañ :
-Petra 'ta ?...ha bez ez out ar profed Eliaz ?...
-n'on ket emezañ."
-Ha bez ez out neuze 'ta ar profed ?
-Hag e respontas : "n'on ket."
- 22- -Piou out eta, emezo, ma roim respont
d'ar re o-deus on digaset...Petra ' lavarez ahanout da-unan ?
- 23- -Me 'emezañ, eo ar vouez o krial en dezert :
kempennit an hent d'an Aotrou,
evel ma lavaras ar profed Izaïaz."
- 24- Lod euz ar re a oa bet digaset a oa Farizianed,
- 25- hag a reas c'hoaz outañ ar goulenn-mañ :
-perag neuze e vadezez, ma n'out ket
nag ar Hrist nag Eliaz, nag ar profed ?"
- 26- Yann a respontas dezo :
-me a vadez en dour
med en ho touez ez-eus unan ha n'anavezit ket,
an hini a-zeu war va lersh
ha n'on ket din da ziskoulm dezañ lasou e zandalennou.
- 28- Kement-se oll a hoarvezas e Betani,
en tu all d'ar stêr Jordan,
el leh m'edo Yann o vadezi.

PEVARE SUL AN AZVENT

Lennadenn genta. 7/1-5, 8^b-11, 16

Ar profed Natan, a-berz Doue, a lavar d'ar roue David
e vo ar Mesiaz (ar Zalver) euz e ouenn.

PENNAD EUZ EIL LEVR SAMUEL

- 1- Eur wech grêt gantañ e annez en e di,
tra ma roe an Aotrou dezañ ar peoh diouz kostez e oll enebourien,
- 2- ar roue David e-neus lavaret d'ar profed Natan :
"Sell 'ta! Emaon-me o chom en eun ti koad-sedr,
hag arh santel Doue 'zo c'hoaz en eun deltenn têt gand krehin."
- 3- Respont a ra Natan d'ar roue : "Kement a zonjez e goueled da galon,
Kê d'henn ober, rag an Aotrou 'zo ganit."

- 4- Med, en nozvez-se end-eeun, an Aotrou a zeu da gomz ouz Natan :
- 5- "Kê, ha komz ouz David, va zervicher, evelhénn: An dra-mañ a lavar an Aotrou
N'eo ket te a zavo eun ti din da zond da jom ennañ (pe: e-barz).
- 8- Da gemeret am-eus pa'edos er prajeier da heul an deñved,
evid da lakead e penn Israel, va fobl.
- 9- Bez' on bet ganit e kement tra out bet kroget da ober,
ha skubet am-eus da oll enebourien diwar da dro
Da ano am-eus laket da veza braz, par d'ar re vrasa war an douar.
- 10- Va fobl Israel am-eus merket dezi he zachenn
e leh ma lakin anezi d'ober gwrizioù,
e leh m'en em gavo er gêr, hag e vevo dienkrez,
heb beza gwasket gand paotred an droug evel gwechall,
- 11- en amzer m'am-boà lakeet barnerien e penn va fobl Israel.
Ober a ran dit bremañ beva er peoh, goude beza trehet da enebourien.
Ouspenn-ze, e lavar dit an Aotrou
ema o vond da zevel dit eun tiegez (pe: lignez).
- 16- Chom a ray da diegez ha da rouantelez en o zav dirazon da virviken,
ha da gador-roue a vo divrall evid atao.

SALM 88 / 2-3, 4-5, 27 & 29

DISKAN.- Madeleziou Doue a ganin da viken
A rum da rum eh embannin (pegen) mad oh bet d'am difenn.

- 2- Madeleziou an Aotrou Doue a ganin-me da viken;
a rumm da rumm eh embannin pegen feal oh d'ho kér.
- 3- Hen lavaret am eus : da viken eo diazezet ho madelez,
war an neñvou eo harpet stard ho fealded.
- 4- Emgleo am eus grêt gand an den dibabet ganin,
touet am eus le da Zavid, va zervicher :
- 5- "Da viken e virin da lignez heb diskar,
ha da gador-roue a zalhin en e flomm a rumm da rumm."
- 27- Eñ a zavo e vouez davedon : "Va zad oh-c'hwi,
va Doue, ha roh va zilvidigez."
- 29- Da virviken e virin dezañ va madelez,
ha didorr e chomo va emgleo gantañ.

EIL LENNADENN. Ar mister n'oa bet ano ebed anezañ biskoaz,
a zo roet deom da anaoud.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR ROMANED. 16/25-27.


- 25- Gloar d'an hini e-neus galloud d'ho kennerza
hervez an Aviel a embannom, o prezeg Jezuz Krist.
Ya, roet ez eus bet da anaoud eur mister ha n'oa bet
ano ebed anezañ biskoaz,
med diskuillet deom bremañ.
- 26- Dre urz an Doue peurbadel,
ha dre zikour ar brofeted
ar mister-se a zo roet da anaoud d'an oll boblou
evid o digas da zenti ouz ar feiz.
- 27- Da Zoue, n'eus fur nemetañ,
dre Jezuz Krist, ra vo gloar da virviken. Amen.

ALLELUIA. Alleluia. Setu amañ servichérez an Aotrou,
ra vo greet din eve! m'ho-peus lavaret. Alleluia.

HERVEZ SANT LUKAZ (I/26-38)

- 26- En amzer-se, e oa bet kaset an El Gabriel gand Doue
d'eur gêr a Vro-Halile anvet Nazared,
- 27- da gaoud eur plah yaouank dimezet d'eun den anvet Jozef,
euz lignez David, hag ano ar plah yaouank a oa Mari.
- 28- Erruet beteg enni, an êl a lavar :
"Me ho salud, leun a hras, an Aotrou 'zo ganeoh."
- 29- Hi a zav strafuill enni o kleved seurd komzou, ha sonjal a ra
ganti heh-unan petra 'hell beza ar zalud-se.
- 30- An êl a lavar dezi : "Na gemerit ket aon, Mari,
rag plijet oh da Zoue.
- 31- Setu emaoch o vond da gonsevi, hag e viot mamm d'eur mab,
a roiot dezañ an ano a Jezuz.
- 32- Hennez a vo braz, ha anvet e vo Mab da Vestr an neñvou,
ha dezañ e roio an Aotrou Doue Kador-roue (pe: tron) David, e dad;
- 33- roue e vo war lignez Jakob da viken, heb fin ebed d'e rouantelez."
- 34- Lavared a ra Mari d'an êl : "Penaoz e hoarvezo kement-se ?
Gwerhez on hag e choman."
- 35- Respont a ra an êl dezi : "Ar Spered Santel a ziskenno warnoh,
ha galloud Mestr an neñvou a holoio ahano.
- Dre-ze, ar hrouadur a vo santel, ha mab da Zoue e vo anvet.
- 36- Ha setu Elizabed, a zo kar deoh, he deus konsevet ive, daoust d'he oad,
hag ar hwehved miz eo eviti, goude ma lavarar ne vo morse mamm.
- 37- Rag Doue n'eus netra dreist e halloud."
- 38- Mari a lavar neuze : "Setu amañ servicherez an Aotrou :
ra vo grêt din evel m'ho peus lavaret."





ANZER NEDELEG

25 KERZU

GOUEL GINIVELEZ JEZUZ KRIST

Overenn an abardaez (d'ar 24)

: levr T, p. 1

Overenn an noz

: levr T, p. 4.

Overenn goulou-deiz

: levr T, p. 7.

Overenn an deiz

: levr T, p. 8.

D'AR ZUL GOUDE NEDELEG

Gouel ar famill zantell Jezuz, Mari ha Jozef.

al lennadenn genta, ar salm, an eil lennadenn

: levr T, p. 18

Aviel

: levr T, p. 80.

Alleluia, alleluia

: Col 3 15

Ra vo peoh ar Hrist en ho kalon.

Ra zougo komz or Zalver kalz a frouez ennoh. Alleluia

DEIZ KENTA MIZ GENVER

en eizvetez gouel Nedeleg.

Santez Mari, Mamm Doue

: levr T, p. 14.

EIL SUL GOUDE NEDELEG

: levr T, p. 16.

EPIFANI OR ZALVER

: levr T, p. 19.

BADIZIANT OR ZALVER

al lennadenn genta, ar salm, an eil lennadenn

: levr T, P. 22

AVIEL -

ALLELUIA. Alleluia. An neñv a zigoras,
ha mouez an Tad a dregernas :
"va mab eo hemañ, va muia karet.
Selaouit anezañ. Alleluia.

Mk. 1/11,9/6.

AVIEL JEZUZ KRIST

HERVEZ SANT MARK 1/7-II.

- 7- Yann-Vadezour a brezege evel-henn er goueleh :
"setu o tond war va lerh,
an hini a zo galloudusoh egedon.
ha n'on ket din, en eur blega,
da ziskoulma lerenn e voutou.
- 8- Me am-eus badezet ahanoñ en dour,
eñ ho padezo er Spered santel."
- 9- Hogen, en amzer-se e teu Jezuz da Nazaret,
kêriadenn euz bro Halilea,
hag e oe badezet gand Yann e stêr ar Jordan.
- 10- D'ar mare m'edo o tond er mêz euz an dour,
e wel Jezuz an neñv o tigeri,
hag ar Spêred santel o tiskenn warnañ,
dindan furm eur goulm.
hag e oe klevet eur vouez euz an neñv :
"-Te eo va mab muia-karet,
ennout e kavan va dudi."



PEDENN AN DIGOR

Pedon Doue...

Doue oll-halloudeg ha madelezuz,
grit ma ne vo morse nag afer ebed euz ar bed-mañ,o
herzel ouzom da vond en arbenn d'ho Mab en e zonedigez,
med grit ma vezim,o heulia kenteliou ar furnez euz an Neñv,
lakeet da gaoul perz gantañ da viken:
En on Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh,Aotrou Doue,ma hounezim ho trugarez,
gand or pedennou hag or provou;
ha,pa'z eo re zister or meritou evid rei pouez d'or goulennou,
deuit d'or skoazella gand sikouricu ho madelez.
Dre Jezuz Krist,Or Zalver. AMEN !

PREFAS AN AZVENT - I pajenn II

GOUDE AR GOMUNION

Maget gant ar bara euz an Neñv,ni ho ped,Aotrou Doue:
dre hrasou an Overenn on eus bet perz enni,
deskit deom priza gand furnez traou ar bed-mañ,
ha trei or halon ouz madou ar baradoz.
Dre Jezuz Krist,Or Zalver. AMEN !

GOUEL AR WERHEZ VARI KROUET DINAMM (8 a viz kerzu)

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue,gand krouidigez dinamm ar Werhez Vari,
ho-peus kempennet kaerra lojeiz da rei digemer d'ho Mab;
pegwir en eur weled dija meritou maro Or Zalver,
ho-peus miret anezi da veza saotret gand pehed ebed,
grit,ni ho ped,ma hellin,ni ivez,dre zikour he fedennou,
beza nê a behed hag erruoud beteg enneh.
Dre Or Zalver Jezuz Krist,Ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Ar Zakrifis a zilvidigez a ginnigom deoh,Aotrou Doue,
da geñver Goel ar Werhez Vari Konsevet Dinamm;
plijet ganeoh e zigemer ha rei deom ar hras-mañ:
evel ma tisklerion en or feiz eo bet-hi miret ganeoh a beb pehed,
ra vezim-ni,dre zikour he fedennou,dizannet euz or pehejou.
Dre Jezuz Krist,Or Zalver. AMEN !

PREFAS AR WERHEZ:gweñoud LEOR OVERENN EVID AN AOTER ,pajenn 49

GOUDE AR GOMUNION

Ar zakramant santel on-eus resevet,Aotrou Doue,
ra bareo ennom an droug grêt gand ar pehed,
ho-peus diwallet dioutañ ar Werhez Vari konsevet dinamm.
Dre Jezuz Krist,Or Zalver. AMEN !

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, pa welit ho pobl o hortoz gand feiz
gouel braz Ginivelez Or Zalver,
grit deom, ni ho ped, digeri or halon da joaieù euR zilvidigez ken dispar,
evid ma raim Gouel Nedeleg gand meuleudicou solanel,
er vrasa levenez bepred.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma talhim bepred,
ni ho servicherien devot, da ginnig deoh ar Zakrifis,
evid lida Mister Sakr an Aoter, e-neus ho Mab lezet ganeom da ober,
hag evid sachha warnom grasou nerzuz ho Silvidigez.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS AN AZVENT - 2

An Aotrou Doue ganeoh ! Ha gand ho spered !
Ho kalon d'an uhel ! Troet eo warzu Doue !
Lavarom bennoz da Zoue, On Aotrou ! Just ha santel eo !

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad,
e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad Santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
dre Jezuz Krist, Or Zalver.
Eñ a oa kelcu azezañ a bell amzer gand an oll brofeted;
Ar Werhez e Vamm, gand karantez tener, he deus e hortozet;
Yann Vadezour e-neus embannet d'an dud edo o tond,
hag e ziskouezet dezo deut en o zouez.
Eñ a laka ahanom bremañ da drei gand levenez
warzu mister e hanedigez,
evid ma kavo ahanom, pa zigouezo, aketuz da bedi,
ha laouen ouz e veuli.

Setu perag a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
e savom or mouez da veuli ho kloar,
en eur lavared a greiz kalon:

COUDE AR GOMUNION

Pedomm oll a-unan...

Ho madelez a bedom, Aotrou Doue:
sikouret gand ar magadur divin on eus resevet,
ra vim gwalhet euz or pehejou,
ha lakeet e stad da lida ar Gouel braz a dosta.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, skuill ho kras en or halonou;
 ni hag on eus anavezet, dre zalud an El, Mister ho Mab en en hrêt den,
 heñchit ahanom, dre e Basion hag e Groaz,
 beteg Gloar an adsao da veo.
 Drezañ, Jezuz Krist, Or Zalver hag On Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

War provou laket amañ war hoh aoter, Aotrou Doue,
 ra ziskenno d'o zantellaad ar memez Spered Glan,
 e-neus karget gand e vertuz kory sakr ar Werhez gloriuz Vari.
 Ni ho ped dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS AN AZVENT - 2 gweloud pajenn I3

GOUDE AR GOMUNION

Ho pedi a reom c'hoaz, Aotrou Doue, goude m'on eus bet,
 er Gomunion an arrez euz ar Zilvidigez peurbaduz:
 seul vui ma tosta ar gouel a zigas deom ar Zalver,
 grit deom mond war well gand seul vui a garantez,
 evid lida e doare Mister Ginivelez ho Mab,
 Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

+++++

A M Z E R N E D E L E G

+++++

GOUEL GINIVELEZ OR ZALVER

OVERENN AN DERHENT (d'ar pardaez)

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, beb bloaz, e roit deom levenez o hortoz or zilvidigez;
 pa 'z om ken lacuen o tigemer ho Mab Unganet evel Salver,
 roit deom ar hras d'e weled heb krena, pa zeuy en-dro evel Barner;
 Drezañ, Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
 Doue beo ganeoh hag gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
 ober deom digeri ar Gouel-mañ,
 gand seul vrasoh mall d'ho servicha,
 ma rit deom gouzoud, dre or feiz,
 ez eo boulhet labour or Zilvidigez,
 gand Ginivelez ho Mab,
 Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS NEDELEG

An Aotrou Doue ganeoh !	Ha gand ho spered!
Ho kalon d'an uhel !	Troet eo warzu Doue !
Lavarom bennoz da Zoue, on Aotrou!	Just ha santel eo !

Just ha santel eo e gwirionez, eun dra dleet ha talvouduz,
ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi ,Tad Santel,Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel.
Rag,dre Vister ho Mab en em hrêt den,
eur sklêrder nevez euz ho kloar a zo paret dirag sellou or spered;
ha bremañ,p'anavezom on Doue deut da veza gwelet,
drezañ ez om douget da gared an traoù na weler ket.

Rag-se,unanet gand an Elez hag an Arhêlez,
ha gand oll sperejou eüruz an Neñvou,
ni 'gan d'ho kloar ar veuleudi,en eur lavared da viken:

Evid ar Bedenn-Veur
"Roman",communicantes
ar gouel.

GOUDE AR GOMUNION

Grit,ni ho ped,Aotrou Doue,ma vim kennerzet,
gand Goueliou Ginivelez Ho Mab Unganet,
eñ hag a ro deom evel ha magadur en e Zakramant Santel.
Jezuz Krist,Or Zalver. AMEN !

+++++

OVERENN AN NOZ (d'ar Pellgent)

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue,an Nozvez Santel-mañ ho-peus karget a sklerder,
gand sked (pe:splannder)an Hini a zo ar wir sklerijenn deuet er bed;
grit deom,ni ho ped,
goude beza anavezet war an douar Misteriou ar Sklerijenn-se,Or Zalver,
kaoud on dudi gantañ e levenez ar BARadoz.
Drezañ,Or Zalver Jezuz Krist,Ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoc'h ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Ra blijio deoc'h,Aotrou Doue,or provadenn (pe:or zakrifis),
da genver ar gouel-mañ;
ha grit ,dre vertuz an Overenn Zantel,
ma teum da veza heñvel ouz ho Mab,
a zo ennañ on natur-ni unanet ganeoc'h:
Jezuz Krist,Or Zalver. AMEN !

PREFAS AN NEDELEG ,or bajenn-mañ.

Fa vez lavaret ar Bedenn-Veur "roman",communicantes ar gouel.

GOUDE AR GOMUNION

Ho pedi a reom,Aotrou Doue,ni hag a zo joa ennom
oh ober Gouel Ginivelez Or Zalver,
ma hellin,dre eur vuez vad,gounid ar hras da veza unanet
ha da veza lodeg gantañ da viken:
Eñ,Jezuz Krist,Or Zalver. AMEN !

+++++

OVERENN AN DEIZ

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue,c'hwi ho-peus krouet ken kaer natur mab-den,
ha kaerroc'h c'hoaz ho-peus he zavet a-nevez;

GRIT DEOM, ni ho ped, kaoud perz e buez-Doue an hini a zo plijet gantañ
kemer on natur-den; Or Zalver Jezuz Krist, Ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Ra blijo deoh, Aotrou Doue, or provadenn ar gouel braz-mañ,
pa 'z eo deuet ho Mab er bed evid kinnig deoh ar Zakrifis
on-eus dreizañ ar Zilvidigez hag ar peoh ganeoh-c'hwi,
hag a ro tro deom d'hoh adori ervad.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS AN NEDELEG pajenn I5

Communicantes ar gouel (roman)

GOUDE AR GOMUNION

Doue madelezuz, setu or pedenn bremañ:-
Salver ar bed hirio,
kenkoulz ha ma ro deom galloud da veza ho pugale,
ra zigasc deom ive donezon ar vuez divarvel.
Eñ, On Doue beo, a oll viskoaz da virviken. AMEN !

OVERENN GOULOU-DEIZ NEDELEG

PEDENN AN DIGOR

Doue oll-halloudeg, pa 'z eo bet skuillet warnom, hirio,
sklerijenn nevez ho Mab en em hrôt den,
grit ma teuo da splanna ive en on oberou,
evel ma sked en or spered, dre ar feiz.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma ve or provou a-zoare
evid Overenn Ginivelez ho Mab;
evel ma 'z eo eñ, ganet hirio evel den, leun a hloar evel Doue,
evelse ive ra zeuio deom, dre ar madou-mañ euz an douar,
donezon ar vuez divin. AMEN !

PREFAS AN NEDELEG - pajenn I5

Communicantes ar Gouel.

GOUDE AR GOMUNION

Aotrou Doue,
p'emaom er joa, oc'h ober gouel Ginivelez ho Mab,
grit deom anaoud, gand feiz gwirion,
sekrejou ar Mister-se,
ha, muioh c'hoaz, kaoud karantez birvidig evitañ.
Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, skoueriou kaer a zo bet plijet ganeoh
 diskouez deom e buez ar Famill Zantel;
 grit deom kerzed war he roudou,
 gand vertuziou an tiegez hag ar garantez evid an nesa,
 evid digouezoud eun deiz ganti e levenez ho Ti,
 da dañva an eürusted peurbaduz.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho mab hag On Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Ar Zakrifis da hounid ho trugarez a ginnigom, Aotrou Doue,
 en eur houlen diganeoh,
 gand sikour pedennou ar Werhez Mamm da Zoue, ha re Sant Jozef,
 mired or famillou stard en ho kras hag er pech.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS AN NEDELEG - pajenn 15 Communicantes ar gouel evid ar bedenn-veur
 "roman".

GOUDE AR GOMUNION

Maget ganeoh er Zakramant Santel, ni ho ped, Tad madelezuz:
 grit deom heulia dalhmad skoueriou ar Famill Zantel,
 evid ma hellim, war-lerh trubuilhou ar vuez-mañ,
 kaoud lod ganti en eürusted perubaduz.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUEL SANTEZ MARI, MAMM DOUE

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, Dre ar Werhez Vari deuet da veza mamm,
 ho-peus roet da ouenn an dud gras ar zilvidigez peurbaduz;
 grit ma santim anezi oh alvokadi evidom,
 hi hag on-eus resevet dreizi Krouer ar Vuez:
 Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou, Doue Beo ganeoh
 ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, ganeoh en ho madelez e vez boulhet ha peurechuet peb tra vad;
 ni ho ped eta, p'emaom er joa gand Gouel Mamm Doue:
 koulz ha m'om laouen gand ho kras en he donezon kenta,
 grit ma vim eüruz, pa vleunio en he haerra.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS EN ENOR D'AR WERHEZ gweloud LEOR OVERENN p.49

"gand GOUEL ar Werhez Gloriz Vari deuet da veza MAMM DA ZOUÉ..."

Communicantes an Nedeleg

GOUDE AR GOMUNION

Laouen om, Aotrou Doue, e veza resevet ar Zakramant euz an Neñv;
 grit, ni ho ped, ma touge frouez ennom evid ar Vuez Peurbaduz,
 ni hag blij ganeom diskleria en or feiz ez eo ar Werhez Vari,
 Mamm d'ar Zalver, ho Mab, ha Mamm an ILIZ. Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PedeNN AN DIGOR

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 splannder an eneoù o-deus ar feiz,
 plijet ganeoh, en ho madelez,
 karga ar bed euz ho kloar,
 hag en em ziskoñez d'an oll boblou,
 dre ar sked euz ho sklerijenn.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
 santellaad ar brovadenn a ginnigom,
 da geñver Ginivelez ho Mab Unganet,
 a zo ganti diskouezet deom hent ar wirionez,
 ha prometet buez Rouantelez an Neñv.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS AN NEDELEG - pajenn 15

GOUDE AR COMUNION

Pedom oll a-unan...

Aotrou Doue, a greiz kalon e houlennom diganeoh
 ma vim, dre vertuz an Overenn-mañ,
 gwalhet euz or pehejou ha pareet euz on techou fall,
 ha ma vo roet deom or goulennou, pa 'z int hervez ho polontez.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

000000000000000000

GOUEL EPIFANI OR ZALVER (Ar Rouaned)

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, da geñver an deiz-mañ, ho-peus, dre ar steredenn,
 roet da anaoud ho Mab Unganet d'ar boblou payan;
 roit deom ar hras, ni hag a anavez ahanoh bremañ, dre ar feiz,
 da vond, eun deiz, d'ho kweled dizelo e splannder ho kloar.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Sellit, gand madelez, Aotrou Doue, ouz provou hoh Iliz:
 n'eo ket mui acur, ezañs, na mir on-eus da ginnig,
 med an Hini a oa skeudennet ganto, bremañ roet deoh e Sakrifikis
 ha roet deom d'or maga,
 Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS EPIFANI OR ZALVER

An Aotrou ganeoh ! Ha gant ho spered!
 Ho kalon d'an uhel ! Troet eo warzu Doue !
 Lavarem bennoz da Zeuz, ON Aotrou ! Just ha santel eo !

Just ha santel eo e gwirionez, eun dra dleet ha talvouduz,
 ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
 c'hwi, Tad Santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel.
 Rag ho Mab Unganet, dre 'n em ziskouez er bed-mañ,
 gand on natur marvel,
 e-neus digaset deom kaerroc'h buez,
 dre eur splannder nevez euz e natur divarvel a Zoue.
 Rag-se, unanet gand an Elez hag an Arhêlez,
 ha gand oll sperejou eüruz an Neñvou,
 ni 'gan d'ho kloar ar veuleudi, en eur lavared da viken...

Pa vez lavaret ar bedenn-
 veur "roman", communicantes
 ar gouel

GOUDE AR GOMUNION

Pedon oll a-unan...
 Ho pedi a reom, Aotrou Doue,
 lakit eur sklerijenn euz an Neñv da bara dirazom bepred hag e peb leh,
 evid ma tigoro or Spered da anaoud ervad Sakramant an Aoter,
 ho peus roet deom perz ennañ,
 ha ma vo gwir garantez en or halon euz e reseo.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

.....

GOUEL BADEZIANT OR ZALVER

PEDENN AN DIGOR

1 . Doue oll-halloudeg ha peurbadel, epad ma tiskenne ar Spered Santel,
 war Or Zalver Jezuz Krist, badezet er stêr Jordan,
 ho-peus-c'hwi diskleriet e oa eñ ho Mab karet;
 ni ho ped, evid an dud ho-peus kemeret da vugale,
 pa 'z int bet ganet a-nevez dre an Dour hag ar Spered Santel,
 ma talhint, heb koeza morse, da heulia ho polontez 'hed o buez.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

2 . Aotrou Doue, c'hwi hag a zo deuet ho Mab karet
 d'en em ziskouez d'an dud gand eur horv evel on hini,
 grit ma vim renevezet en on diabarz,
 gand an hini on-eus anavezet heñvel ouzom en diavêz:
 Eñ, Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
 kemer ar provou a zigasom deoh da geñver an Deiz
 m'ho-peus diskouezet deom Jezuz evel ho Mab karet;
 grit ma teuo provadenn ho tud fidel
 da veza Sakrifis ar menez Jezuz,
 a zo fellet gantañ, en e drugarez, gwalhi pehejou ar bed,
 Eñ on Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

PREFAS

An Aotrou Doue ganeoh !	Ha gand ho spered !
Ho kalon d'an uhel !	Troet eo warzu Doue !
Lavarom bennoz da Zoue, On Aotrou !	Just ha santel eo !

Just ha santel eo e gwirionez, eun dra dleet ha talvouduz,
 ho trugarekaad, e peb leh hag e peb amzer,
 C'hwi, Tad Santel, Aotrou Doue, oll-halloudeg ha peurbadel.
 Hirio, war doureier ar Ster Jordan,
 e fell dech rei deom da anaoud ar Vadeziant nevez:
 eur vouez a ziskenn euz an Neñv,
 evid rei testeni ema ho Komz o chom etouez an dud,
 hag ar Spered, en em ziskouezet dindan sturm eur gouln,
 a gensakr ho servicher Jezuz,
 evid ma zeui da gas d'ar beorien ar helcu mad.
 Rag-se, gand Elez an Neñvou,
 ni a hell rei dech bennoz war an douar,
 hag hoh adori en eur gana (lavared)...

GOUE AR GOMUNION

Maget gand ar Zakramant Santel,
 e pedom c'haz ho madelez, Aotrou Doue,
 en eur zelaou gand feiz ho Mab Unganet,
 grit ma vim anvet, ha ma vim e gwirionez ho pugale.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

+++++

-WAR AR BLOAZ-

Ar zuliou "war ar bloaz" (per annum) a vo lakeet, el levr-overenn, da fin
 al levr. Med an eiz kenta zigouez, er bloaz-mañ, da veza lavaret araog Amzer ar Ho-
 raiz; setu perag e lakom anezo amañ.

EILVET SUL WAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 mestr war draou an neñv hag an douar,
 selaouit gand madelez pedennioù ho tud fidel, +
 ha roit d'on amzer an donezon euz ho pech.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Roit deom ar hras, Aotrou Doue,
 da gemer perz en Overenn-mañ,
 gand gwir feiz ha karantez; +
 rag beb gwech ma vez lidet ar zonz euz Sakrifis ho Mab,
 e vez adnevezet labour burzuduz or zilvidigez.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS AR ZULIOU WAR AR BLOAZ I

E gwirionez, just ha santel eo
 ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
 C'hwi, Tad Santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 dre Jezuz Krist, Or Zalver.
 Gand Mister e Bask, pa 'z eo bet marvet ha savet da veo,
 pebez ober burzuduz e-neus grêt Jezuz:
 tenna ahanom a-zindan galloud ar pehed hag ar maro,
 evid or gelver d'ar stad enoruz m'eo on hini;
 rag bremañ e vezom anvet: poblad-tud dibabet gand Doue, gouenn zantel,

broad a veleien hag a rouaned, poblad dasprenet,
 ha deom an enor da vruda e peb leh
 an traou kaer grêt dre ho kalloud,
 C'hwi hag ho peus tennet ahanom euz an deñvalijenn,
 evid or golver da vond en ho sklerijenn.

Setu perag, a-unan gand an Elez hag an Arhêlez,
 ha gand oll sperejou eüruz an Neñvou,
 ni 'gan d'ho kloar ar veuleudi, en eur lavared da viken:

PREFAS AR ZULIOU WAR AR BLOAZ II

E gwirionez, just ha santel eo
 ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
 C'hwi, Tad Santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 dre Jezuz Krist, Or Zalver.
 Gand truez ouz an dud kollet dre ar pehed,
 ho Mab a zo bet teurvezet gantañ dond er bed-mañ
 ha beza ganet gand ar Werhez Vari;
 o vervel war ar groaz, e-neus roet deom ar vuez peurbaduz.
 Setu perag a-unan gand an Elez hag an Arhêlez
 ha gand holl sperejou eüruz an Neñvou,
 ni 'gan d'ho kloar ar veuleudi, en eur lavared da viken:

GOUDE AR GOMUNION

Skuillit ennom, Aotrou Doue, spered ho karantez:
 goude beza or maget gand ar memez bara euz an Neñv, +
 grit deom beza unanet kenetrezom er memez karantez.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

+++++

TREDE SUL WAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 ni ho ped da veza o rén on oberou,
 hervez ho polontez madelezuz,
 evid ma hellin beza karget a oberou mad,
 en Ano ho Mab karet,
 Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganech ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganech, Aotrou Doue, digemer, gand madelez, ar provou-mañ, +
 en eur skuill ho santelez enno, bremaig, evid o zakri,
 grit ma vezint talvouduz evid or zilvidigez.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS AR ZULIOU (e neh ar bajenn)

GOUDE AR GOMUNION

No pedi a reom, Aotrou Doue oll-halloudeg:
 ni hag on-eus bet ar hrâs da gaoud diganech eur vuez nevez,
 r a vim laouen bepred gand an donezon a roit er Zakramant.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PEDENN AN DIGOR

Grit deom, Aotrou Doue,
 enori ahanoh gand oll nerz on ene,
 ha karoud an oll dud ablamour deoh.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
 kemer diganeom, ho servicherien,
 ar provou a zigasom amañ war an Aoter,
 deoh da ober anezo Sakramant or Zilvidigez.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS AR ZULIOU - pajenn 20 ha 21

GOUDE AR GOMUNION

Ho pedi a reom, Aotrou Doue,
 goude m'om bet maget gand Sakramant Or Zilvidigez: +
 dre ar zikour a zigas d'an dud evid ar vuez peurbaduz,
 grit ma 'z ay ar gwir feiz atao war gresk.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PEMPVET SUL VAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...
 Aotrou Doue, dre ho madelez ha na skuiz morse,
 ni ho ped da veilla war ho familh;
 pa n'hell ho pugale kacud fiziañs nemed e sikour ho kras,
 dalhit bepred d'o diwall diouz peb droug.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Taolit ho sellou, Aotrou Doue,
 war ar bara hag ar gwin-mañ,
 bet krouet ganeoh da genta,
 evid rei nerz d'or zempladurez: +
 plijet ganeoh ma teuint da veza evidom bremañ
 Sakramant ar vuez peurbaduz.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS AR ZULIOU - pajenn 20 ha 21

GOUDE AR GOMUNION

Aotrou Doue, ho-peus greet deom on lod
 euz ar nenez bara hag euz ar memez kalirad,
 or zikourit, ni ho ped, da veva en doare ma vim, oll
 unan hebken en Aotrou Krist,
 ha ma tougin frouez evid silvidigez ar bed,
 gand gwir levenez.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, c'hwi hag a lavar e plij deoh
 ober ho chomaj er halonou eeun ha glan,
 roit deom sikour ho kras, ma hellim beza
 euz ar seurd tud fidel a deurvezit beva enno.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou Doue beo ganeoh
 ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
 ma talvezo ar brovadenn-mañ (pe: ar zakrifis-mañ)
 da beurwalhi on ene ha da rei deom buez nevez,
 deom-ni hag a glask heulia ho polontez,
 ra vo ivez eur vammenn a veritou
 evid ar vuez peurbaduz.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS AR ZULIOU - pajenn 20 ha 21

GOUDE AR GOMUNION

Maget gand ar bevañs dudiuz deuet euz an Neñv,
 ni ho ped, Aotrou Doue,
 da zelher ennom bepred
 ar hoant d'ar bevañs-se,
 a ro deom ar vuez gwirion.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

+++++

SEIZVET SUL WAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Grit, ni ho ped, Aotrou Doue,
 ma vo or zonz bepred gand madou an ene,
 ha ma ne raim morse nemed ar péz a blij deoh,
 dre gomz koulz ha dre ober.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Ho pedi a reom, a-greiz or balen, Aotrou Doue,
 en eur lida an Overenn Zantel, gand an aked a dleom:
 ar Zakrifis a ginnigom en enor d'ho kloar,
 grit ma vo talvouduz ivez d'or Zilvidigez.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS AR ZULIOU - pajenn 20 ha 21

GOUDE AR GOMUNION

Grit, ni ho ped, Doue oll-halloudeg,
 ma hellim reseo, en e féz, ar zilvidigez evuruz,
 on eus bet an arrez (pe: an tañva) anezi,
 dre an Overenn-mañ,
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PEDENN AN DIGOR

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
ma reno ar peoh muioh-mui, dre ar béd, hervez ho polentez,
ha ma kavo ho pugale levenez ouz ho servija, heb enkrez.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, diganeoh eo e teu deom ar pezh a ginnigom deoh:
ha koulskoude, evidoh, ar brovadenn a zeu euz or harantez:
ho pedi a reom eta gand fiziañs,
pegwir n'on-eus kén talvoudegez nemed, dre ho tonezonou deoh,
ra daolint frouez ennem,
evid al levenez peurbaduz.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS AR SULIOU - pajenn 20 hag 21

GOUDE AR KOMUNION

Maget ganeoh, Aotrou Doue,
dre ar perz on-eus kemeret er Mister a zilvidigez,
ni ho ped c'hoaz, dre Ar Zakramant a ra on nerz, hirio,
grit ma vevim hganeoh da viken.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

AMZER AR HORAIZ

MERHER AL LUDU

KAN AN DIGOR (Levr ar Furnez II/24-27)

Truez a gemerit ouz an oll dud, Aotrou Doue,
ha n'ho-peus kasoni ouz nikun euz ho krouadurien;
ne fell ket deoh selled ouz pehejou an dud,
evid rei dezo amzer d'ober pinijenn,
ha pardoni 'rit dezo, rag c'hwi eo or Mestr, On Doue.

(an heveleab testenn war gan (ton N°2I "Eun Doue a zeu d'ho kervel...))

- | | |
|--|--|
| 1. C'hwi 'peus truez ouz an oll dud,
Doue, Tad oll-halloudég;
re vad oh 'vid kaoud kasoni
ouz an dud krouet ganeoh. | 3. Penaoz 'hellfe nikun beva
ma ne 'fell deoh e groui ?
Penaoz 'hellfe chom e buez,
ma n'eo ket dalhet ganeoh ? |
| 2. Daoust pegen braz ar pehejou,
ne fell ket deoh o gweled;
gwelloh 'kavit rei d'ar peher
amzer d'ober pinijenn. | 4. Pardoni 'rit d'ar beherien,
Doue, mignon d'ar re veo;
enno e hwezit ho spered,
hag e teuont beo en-dro. |

(Al lid a binijenn a lezer a-gostez, pegwir e vo roet al ludu warlerh
ar brezegenn. Rag-se, goude salud ar beleg ha Kirie eleison, e lavarer
pedenn an digor, amañ warlerh.)

PEDENN AN DIGOR

Roit deom ar hras, Aotrou Doue, da voulha, gand pinijennou santel ar Horaiz,
ar brezel on-eus da rén, er vuez kristen; +
evid stourm ouz an droug-sperejou, ra zeuio nerz deom,
dre zicueri or boued hag on êzamanchoù.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

DA VENNIGA AL LUDU (goude ar brezegenn)

(ar beleg a zav hag a lavar unan euz an diou bedenn amañ war-lerh,
gand eur gérig araog, evelhénn pe en eun doare all)

Va breudeur kër, pedom a greiz kalon, Doue, On Tad,
ma plijo gantañ taoler e vennoz madelezuz war al ludu-mañ ha warnom-ni,
a zo o vond da lakad ludu war or pennou,
dre binijenn (pe: evid merka or bolontez d'ober pinijenn)

PEDENN A/ Aotrou Doue, n'eo ket maro ar beherien a glaskit,
med o distro davetch,
selaouit or pedennou gand madelez, ha plijet ganeoh
+ benniga al ludu-mañ, erac'h o vond da lakaad war or pennou;
ni hag a anzav ez on grêt gand poultrenn an douar
hag e tleam mond en-dro da boultrenn,
grit deom heulia a-zevri ar Horaiz-mañ, evid reseo diganeoh,
ar pardon euz or pehejou hag ar hras da veva eur vuez nevez,
diwar skouer patrom ho Mab savet a varo da veo.
Drezañ, Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PEDENN B/ Aotrou Doue, n'eo ket maro ar beherien a glaskit,
 med o distro davedoh,
 selaouit or pedennou gand madelez, ha plijet ganeoh
 + Benniga al ludu-mañ, emaoñ o vond da lakaad war or pennou;
 ni hag a anzav ez om grêt gand poultrenn an douar,
 hag e tleom mond en-dro da bouldrenn,
 grit deom heulia a-zevri ar Horaiz-mañ, evid reseo diganeoh
 ar pardon euz or pehejou hag ar hras da veva eur vuez nevez,
 diwar skouer ha patrom ho Mab savet da varo da veo.
 Drezañ, Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

(bez 'e hell taoler dour benniget war al ludu
 heb gêr ebed.)

Ar beleg a lak ludu d'an dud fidel war o fenn, pe war o zal, en eur lavar-
 ed da beb hini.

Grit pinijenn ha kredit en Aviel !

pe:

Sonjit ez oh ludu, hag ez eot en-dro da ludu!

WAR AR PROVOU

Ar zakrifis-mañ a ginnigon, Aotrou Doue,
 da zigeriñvel beb bloaz, anzer zantel ar Horaiz,
 o houlen diganeoh nerz da boania gand an oberou a binijenn
 hag a garantez ha da gabestra or hoantou fall,
 evid ma hellin, gwalhet euz or pehejou,
 lida gand karantez Pasion ha Maro ho Mab,
 Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS ER HORAIZ, DA VERNER AL LUDU

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad,
 e peb leh hag e peb anzer,
 c'hwi, Tad Santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 dre Jezuz Krist, Or Zalver.
 Rag dre ar pinijennou e vougit ennom ar gwall-dechou,
 e savit or sperejou d'an uhel,
 e roit deom nerz da boania ha digoll peurbaduz,
 dre Jezuz Krist, Or Zalver.
 Drezañ, Tad Santel, ez oh meulet
 gand an Elez hag an oll Zent,
 ha ganto e fell deom unani or rouezioù,
 evid lavared a greiz kalon:

GOUDE AR GOMUNION

Ar gomunion on eus grêt, Aotrou Doue,
 ra zigaso deom sikour,
 evid ma hello on oberou a binijenn plijoud deoh
 ha talvoud d'or parea. DRE Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PEDENN AN DICOR

Roit deom ar hras, Doue oll-halloudeg:
 en eur heulia pedennou hag oberou santel ar Horaiz,
 ra zeuim da gompren gwelloc'h Mister braz
 ar Zilvidigez, dre Jezuz Krist,
 ha da labourad evid ar zilvidigez-se,
 en eur veva direbech.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
 lakaad ahanom e stad vad,
 evid kinnig ar Zakrifis-mañ,
 da zigeri Amzer Santel ar Horaiz.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS SULIOU AR HORAIZ A

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad,
 e peb leh hag e peb amzer,
 c'hwi, Tad Santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 dre Jezuz Krist, Or Zalver.
 Rag beñ bloaz, e kalvit ho tud fidel da walhi o aneo,
 evid gortoz, laouer, gouelioù santel ar Pask.
 Evel-se, p'o devo poaniet startoc'h d'ho servicha
 ha da ziskouez karantez d'o nesa,
 ha pa zistroint da varrenn o buez kristen,
 Pask Or Zalver hag e zakramenchoù,
 e tigor brasoc'h o halon d'ar hras a ra anezo ho pugale.
 Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
 e savom or mouez da veuli ho kloar,
 en eur lavared a greiz kalon:

PREFAS SULIOU AR HORAIZ B

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad,
 e peb leh hag e peb amzer,
 C'hwi, Tad Santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 dre Jezuz Krist, Or Zalver.
 Pa 'z eo chomet daou-ugent dervez heb debri,
 e-neus -eñ roet ar skouer kenta euz Kentaiz ar gristenien;
 hag en eur ziarbenn ardou an droug-spered,
 e-neus desket deom trehi var an techou fall,
 evid ma hellim, o lida euz or gwella Mister Braz Pask Or Zalver,
 beza prest da dreiza, da fin or buez,
 beteg Pask peurbaduz ar Baradoz.
 Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
 e savom or mouez da veuli ho kloar,
 en eur lavared a greiz kalon:

GOUDE AR GOMUNION

Resevet ganeom ar Bara euz an Neñv,
 a vez maget gantañ ar feiz, startee an esperañs,
 ha roet nerz d'ar garantez,
 ni ho ped, Aotrou Doue, grit ma teskim kaoud naon euz Or Zalver,
 ar Bara Beo gwirion, hag en em vaga diwar gement komz lavaret deom ganeoh.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, ho-peus gourhemennet deom selaou ho Mab karet,
 ho pet ar vadelez da vaga on eneoù gand ho Komz,
 evid ma vo sklêrreet sellou or spered,
 ha ma hellim, e-kreiz al levenez,
 gweled splannder ho kloar.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou
 Doue beo ganeoc'h ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, ma talvezo ar Zakrifis-mañ,
 da walhi or pehejou ha da zantellaad korv hag ene ho tud fidel,
 evid ma vint e stad vad da lida gouelioù ar Pask.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS SULIOU AR HORAIZ A pajenn 27

PREFAS AN EIL SUL

E gwirionez, just ha santel eo
 ho trugarekaad e peb lec'h hag e peb amzer,
 C'hwi, Tad Santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 dre Jezuz Krist, Or Zalver.

Goude beza, en araog, diskleriet doare e varo d'e ziskilhen,
 e-neus Jezuz, war ar Vuez santel, diskouezet dezo splannder e hloar,
 evid rei da intent, harpet war desteni Moizez hag ar Brofeted,
 ez eo, dre boaniou ar Basion, e tleer mond da hloar an Adsao d'ar Vuez.

Setu perag a-unan gand an Elez hag an Arhêlez,
 ha gand oll sperejou eüruz an Neñvou,
 ni 'gan d'ho kloar ar veuleudi, en eur lavared da viken:

GOUDE AR GOMUNION

Aotrou Doue, en eur reseo ar Zakramant,
 Or Zalver beo da viken en e hloar,
 ez eus mall ganeom d'ho trugarekaad,
 evid ar vadelez ho-peus, p'emaom c'hoaz, er bed-mañ,
 da rei deom perz e madou ar Baradoz.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

+++++

TREDE SUL AR HORAIZ

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, Tad peb trugarez ha peb madelez,
 c'hwi ho-peus desket deom kaoud ar pare euz or pehejou,
 dre ar Binijenn, ar bedenn hag an oberou a garantez;
 taolit ho sellou warnom,
 pa govesaom ouzoh, a galon izel:
 neuze, tra ma ra deom or houstians stoui d'an douar gand keuz,
 e vezim divehiet ha savet en or zav, dre ho trugarez.
 Dre Or Zalver Jezuz KRIST ho Mab hag On Aotrou,
 Doue beo ganeoc'h ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR PROVOU

Dre ar Zakrifis-mañ, Aotrou,
 plijet gand ho madelez,
 ma vo ennom gwir volontez da bardoni o mankou d'or breudeur,
 pegwir e pedom evid kaoud ar pardon euz or pehejou on-unan.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS SULIOU AR HORAIZ A pajenn 27

PREFAS AN TREDE SUL

E gwirionez, just ha santel eo,
 ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
 c'hwi, Tad Santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

Evid mad ho pugale,
 da renta dezo glanded ha santelez an ene,
 c'hwi ho-peus grêt dibaba an amzer-mañ dreist ar re all,
 evid distaga o halon diouz peb c'hoantegez direiz,
 ha gouzoud penaoz pledi gand traou tremenuz ar bed-mañ,
 en eur zelher muich c'hoaz d'an traou na dremenont ket.

Setu perag, a-unan gand an Elez hag an Arhêlez,
 ha gand oll sperejou eüruz an Neñvou,
 ni 'gan d'ho kloar ar veuleudi,
 en eur lavared da viken...

PREFAS AN TREDE SUL, pa vez lennet aviel ar zamaritanez.

E gwirionez.....

Eñ, pa houlenn dour da eva digand ar Zamaritanez,
 e-noa dija silet enni donezon ar feiz,
 hag a zo plijet gantañ kaoud sehed euz feiz ar vacuez-se,
 evid enaoui, en he halon-, tan ar garantez divin.

Rag-se, e teuom, ni ivez, d'ho trugarekaad,
 ha gand an ILiz, e kanom hok oberou kaer,
 en eur lavared....

GOUDE AR KOMUNION

Resevet on-eus, Aotrou Doue, an arrez
 euz madou kuzet ar Baradoz,
 ha p'emaom c'hoaz war an douar,
 eo bet torret deom hon naon,
 gand ar Bara euz an Neñv;
 ho pedi a reom eta, a greiz kalon,
 ma teuio da wir en or buez,
 kement a zo grêt ennom,
 dre vertuz an Overenn.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

Troidigeziou aotreet da arnod, evid an eskopti
 a-berz an Aotrou F. Barbu, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'an 10 a viz kerzu 1971

+ Visant Fave, eskob-skoazeller